

488

Boneur ar Scolach,
Composet erit distribution ar prison,
E Scolach Castel,
Ar 16 eus a vis Eost 1839.

(428)

Kar ar toy gallec : Rions, chantons, aimons, etc.

O deiz a laouenidiguez,
Nac a joa a zantân em c'halon,
O velet teneridiguez
Gement a dud eus a bep canton
Diredet da verza teston
D'eur ceremoni nobl ha touchant
A ra tridal hor c'halonou
En eur feçon meurbet ravissant! } diou vech.

Tadou, mamou carantêzus,
C'houi pere 'c'heus bet ar avantach
Da glaz rei scoier eus ar vertus
D'ho fugale amâ er scolach,
Sellit - o gant rejoissanç,
Ar joa a luquern e peb-hini,
O receo hirio 'r recompanç
Deus o furnes ha deus o studi. } diou vech.

(429)

Dleout a reomp anaoudeguez
D'ar mestrou demeus ar scolach - mâ,
Pere, leun eus a vadelez,
Ho ramplaz avantajus amâ.
O goalc'h a reont oll meurbet
D'hor renta christenien deread,
O tont da orni hor speret
Demeus a bep seurt principou mad. } diou vech.

Eun anaoudeguez spicial

489

Hon doug da bresanti hon hommach
 Hirio d'an autrou Principal (1)
 Pehini a enor ar scolach :
 Graç dezàn da veza bepret,
 D'ar re a vo dindan e bouvoar,
 Leun a garantez, ha yec'het
 Epad e vuez var an douar. } diou vech.

(430)

Ar vro antier a dle hommach
 Da vemor ar Pastor venerabl
 A voezas founti hor scolach
 Gant eur soign vras ha meurbet meubl !
 Enor eta da virvigen
 D'an Autrou La Marche, Episcop Léon!...
 En Breiz e tle peb gvir gristen
 Couserv e vemor en e galon. } diou vech.

Ra deuzo ivez en deiz-mâ
 An Autrou Escop eus a Quemper (2)
 Da zantout en e galon joa
 O c'houzout hon eus gret hon dever.
 Ar memes joa vo evidomp,
 Mar hor c'hav dign derneus anezàn,
 Rac contant meurbet e vezomp
 Mar bemp eurus da blijout dezàn. } diou vech.

(434)

Deposomp oll peb a fleuren
 Var bez tri den an enorapla, (3)
 Pere voezas goechal qelen
 Ar vertuz ebars ar scolach-mâ,
 Ha regetomp digant Doue
 Peb seurt bonneur d'hor mestrou hirio :
 Assuret int, hed hor bue,
 N'ancounac'haimp bigen anezo. } diou vech.

An natur a zoug ac'hanoimp

(1).- An autrou Monfort, pehini, diverzatoch, e 1841, a zo bet ingrat haec injust en em andret.
 (2).- An Autrou Poulpiquez de Brescañvel, prelat venerabl, pehini na zelaoue get ar c'halonni infam,
 a grede haec a rente justig d'ar virvigen.
 (3).- Gement den a zo bet eurus da hanavezout an autrouez Peron, Liscoet haec ar Gall, o devezo
 atao quoz dezo.

490

Da garout autoret hor bue,
 Hac an anoudequeuz ro deomp
 Carantez vit hor mestrou ive.
 Bac-se-ta, scolærien yaouanc,
 Conservomp atao ey hor memor
 Sonch er re o deus, hep nep manc,
 Disqet deomp an hent eus an enor. } diou vech.

Nep n'o deus get bet ar boneur
 Da c'houant eur pris ey deiz caer-mã,
 A deuzo, hep dale nemeur,
 Adare da gwiemer renq amã;
 Neuze, carguet eus a gourouch,
 E studiint gant calz a arder,
 Vit beza dign eus hor scolach
 Ha da ober d'o c'herent enor. } diou vech.

O tont da quittäat ar scol-mã, (432)
 Darn da nebeut, darn all da rigen,
 Promettomp a galon amã
 D'en em garout vel gwiir gristenien.
 E peb oad, e peb lec'h e zimp,
 Gen a dost evel demeus a bell,
 A fonz hor c'halon e criimp:
 Enor ha gloar da scolach Castel!... } diou vech.

fin.

A. Lédan

Gant tad eur scolaer ancien eus a Scolach Castel.

(Vol. IV, p. 428-432.)
 10 str. numérotées.